

# DISPUT

LIBRAIRIE DE  
LA VILLE

## Etre eul LEONARD hag un TREGUERIAT

*Var un ton ancien*

Mar plich ganèc'h, selaouit hac cléfot cana  
Ur chanson so compostet a nevez er blos-mà,  
Zo grèt da zaou zen yaouanq o devoa speret mat;  
Ebars en hostaliri oc'h eva boutaillat.

Al Leonard a c'houlen digant an Tregueriat :  
Lavar din-me, va mignon, ha te so ur pot mat;  
Evidont-me so agil, ouspen oun mat a grog,  
Rac souben vad a meus me, alies te pez yod.

Ha me, eme'n Tregueriat, a so soupl a goubiou  
A voar larda va gouzoug gant ar grampoezenou ;  
Va yod a zebran ive alies coulz ha c'houi ;  
Mar oc'h eus c'hoant da gregui, sortiomp eus an ty.

Non pas, eme'l Leonard, lezomp an traou-se tout,  
Hac evomp peb a vanne da rinc'h hor gouzoug :  
Ne blich qet din ar gannou, ispicial pa velan  
Va goat e tott da redéc, da fatica. e teuan

Control, eme'n Tregueriat, pa vezan malicet  
Ne ran fors evit guelet va goad sur o redéc ;  
Potret Treguer zo agil, tout ec'h ouzont lampet ,  
Neus netra ousou ampec'h, bian eo o lavrec.

Ne choqit qet Leonis gant o bragueyer bras,  
Rac traô eus ar modesta e zint, mar hoc biscoas ;  
Neus nicun quer caer guisquet en escopi Treguer  
Evel ma zeo Leonis gant o dillat, mezer.

Guir avoalc'h a leverez, mat eo sur dà réson ;  
Mezer brao so en Leon, mes grèt int difécon :  
Guicamanchou Leonis a gavan divalo,  
An trifars eus ar goaset a guz oll o bragou.

Choi entrezoc'h, Tregueris, ho pragueyer so ourlet  
Evel ma vent mailluret en dro d'ho tiou vorzet :  
Ho chupennou so flanchet, ho touc so campet,  
Casimant e zoc'h ènvel demeus ar soudardet,

C'houi entrezoc'h, Leonis, oc'h ens rochedennou  
A so grèt evel sier da zonguen sac'hadoù ;  
Ho pléo a so biscoulet, ho touc distroncet,  
Da zioual ho tiscouarn, rac aon na veut chasset,

En an, pa ve pardonnou, me a zo bras souezet,  
O velet merc'het Treger penos e zint guisquet :  
Tout o deus dantelezou en dro d'o c'hocfou bér,  
Tortillet endro d'o bizach evel ur torchouer.

Comzomp avec'het Leon, dindan o c'houefou bras,  
Ma veut emesq Tregueris, n'o dese mui a c'hrs ;  
Ar panez zo faticus ouspen ma zint noazus,  
Rac aon bras sur o deveus na vanque boued d'o zud.

Penevert ma ya Leonis en Treguer da neuta,  
E c'halfac'h derc'hei ho merc'het er guér da azezan :  
D'azeza ha da zansal qen huel bo fen,  
Rac Leonis ze potret hac a gar an neud goen.

Ha na deufe qet Leonis en Treguer de neuta,  
Ni hon eus marc'hadoùrien er guér ous o frena,  
Hac o guerz da Leonis, dre ma zin mast ga soupl,  
Rac ar merc'het a Leon a ne evel neud stenp,

Me vel erfat, va mignon, divalo e parlantet,  
Ma vec'h cavet e Leon, c'houi a ye divlelét ;  
Ho merc'het ni zo agil hac oar n'em mania ,  
Ur gourach vrás o deveus pa gomançont facha.

Me voar erfat, va mignon, int un tamie cruel,  
Mes ive n'int qet seder evel merc'het Treguer ;  
Tout en o c'havân rusiq, dindan o c'houefou bras,  
Hoc merc'het ni zo ceder ha joaüs ho bisach.

Tevel a ri, va mignon, ne teus sur tam réson,  
Birviqen na pe maques a escopi Leon :  
Qemer ur plac'h a Dreguer, ha dalc'h-hi en e renq  
A ficho dide crampoez da zebri gant lès trenq.

Pa barlantes a crampoez, ganemp-ni en hor bro  
E zeus calz a Leonis gant neud dre'r marc'hajou,  
Hac a zaill gant ar c'braumpoez pa ellent o c'havet,  
Ha c'hoas goudre o debri a lip o biziet.

Coll a ran ganit, Tregueriat, n'allan mui chom amàn  
Poan a ra diu em c'halon, me meus aoun ne doun clàñ :  
Mar car Blor imprima hon disput var baper,  
E laqay da c'hoarzin Querne, Leon, Treguer.

Ar zon-mà zo compostet evit hoc'h amusi,  
Ha non pas vit ma vezo entrezoc'h fachiri :  
Bezit eta a Dreguer, a Guerne, pe Leon,  
En em garit etrezoc'h vel a dle peb Breton.

Guechal en em occupet gant calz a chansonniou  
Ha n'en em genet morse gant follenteziou :  
Rac se oll, mar am c'hredit, prenit peb a chanson,  
Ha canit nos a mintin, deus a greiz ho calon.

Pa vec'h e creiz ho labour, occupet hed an de,  
Lesit ho corn ha canit ur chanson vras penze :  
Nebeutoc'h e coust certen ha yac'hussoc'h ouspen  
Cana eguet n'eo fumi nac eva gigoden.

Elec'h ma zeo imprimet an diou chanson gôsmà  
E vezo cavt unan evit bep deiz ar blosa ;  
Aa ma na vez qet aoufalch e vezo ajoutet,  
Evit laqat joaüstet etouez ar Vretonet.

D'an nôs, pa ve assamblet ar famili goudre coan,  
Azeet eu dro d'an oalet e qichennic an tâu,  
Canit pepini d'e dro ur chanson vras neuze,  
Ha m'en assur e couscot calz guelloc'h goudre-ze.

FIN

# CHANSON CUPIDON

## Var un ton anavezet.

TOSTAIT, tud yaouanq, da glèvet ur chanson  
Anevez compostet var sujet Cupidon,  
Ha me a gonto déch darn eus an effrejou  
A brodu beurvuia ebars er galonou.

Neoun qet ens petra dont d'er gomparachi:  
N'eo e nep lec'h ha partout gousconde ec'h éri,  
Nemet ous an avel, a so oll penetrant,  
En so er memes tra etoues an dud yaouanq.

Me zo bet pell amzer e clasq dioñal ounta;  
Pen deus va suprenet, e meus renget plega,  
Au objet a garau a verit qement-se:  
N'em bije quez ebet, m'or bijemp liberte.

Mes allas ! calz a boan am bo da anduri.  
Quent n'am bo ar boneur d'allout e fossedi,  
Mes e creis va foaniou e teuan da gompreñ  
Etouez ar brassa drein vez ar gaera roseu.

Pa voan o studia, m'em boa bet ur guetel  
Digant ur mignon din hac am gare fidel,  
Da zioñal ya c'halon eus an amouroustet,  
Pe bijen blijadur u'an bije var ar bed.

Ebars eu amzer-ze ne allen qet credi  
E vije'n amitie capabl d'am areti,  
Aac a greis va c'halon me a c'hoarze neuze  
Da guement a zouge chaden an amitie.

Bremà e velan sclér, nespét d'am imprudanç,  
Qon forcez da gredi dre va experianç;  
Venus ne vanq james da veza trioufant:  
Ret eo oboissa, an natur a gommard.

Ma velfes ac hanon bremà, va c'hamarad,  
Va c'halon languissant, beuzet va daoulagad,  
Aneone'hét, gauen an avis salut  
A poa bet roet din er guer a Landreguer.

A boan e hall va dorn cundai va ilouen,  
Va speret so troublet ha carguet a anqen.

Da avis saluter ne vel qet eus va speret,  
Mes, siouas d'am c'halon, ne mens qet e heuillet.

Vel ur c'bareat fleur goloet a louzou,  
Eo carguet va c'halon eus a huanadou  
Chagrin continual abreuvet em glac'hár,  
Evel un durzunel pa ve collet e far.

N'en deus var ar bed na ne vezò biquen,  
A oufe expliqna na genebeut compren  
Degré an amitie, pa ve parfaimant  
Unisset a galon entre daouzen yaouanq.

Doctoreta Sorbon bac a filosofi,  
Rhetoriq, Seminer bac a Dheoloji,  
Oll quiet an nature laget tout e unan  
Da ober an dra-ze e ve tout re vian.

Va c'halon re dener n'out qet hac en allo  
Heg ranna daou anter o clévet nr c'helou :  
Lavaret e eus din gant darn va mignonet,  
Emà ar goal deodou oc'h ober ur bojet.

Da réit din va-unan ha d'am mestrez da choas  
Dont d'en em separi pe gaout evit partach  
Eur bojet o deuz grët eus a beder fleuren :  
Chagrin, melancoli, poan-speret hac angen

Arça teod miseral, ha neo qet poent dide  
Lezel pelleoc'h en peoc'h hac an tranquilite  
An dud yaouanq er vro da rën o yaouanqis,  
Ive den em garout ebars en honestis ?

Partout elec'h ma zes te laqa an anqen ;  
Goas out ebars er vro egét na ze ar vocen ;  
Hac ar c'homzou poezus a roes da bepin  
Zo capabl ha laqat ar vein d'en em zebri.

Entre tad ha buguel, etre ar breur, ar c'hoar,  
Etre ar priejou te laqa ar glac'hár ;  
Mestrou, domestiqet, querent ha mignonet,  
A greis o flijadur te peus o zeparet.

Cléo ar Speret-Santel o parlant er Scritur,  
E vezò miliguet ar goal deod dinatur,  
Dre ma laqa malis ha separation  
Etre tud a veve ebars en union.

Cléo Sant Yan o parlant en e Apocalyps,  
Sant Gregor ha Sant Paol, Doctoret an Ilis,  
A lavar en devo ar goal déod da bartach  
A leun-ont infernal carget eus a arrach.

Ha c'hui tud curius a drémen vit tud fur,  
O clévet goal déodou, c'houi guemer plijadur:  
Lennet pis ar Scritur hac e velfot merget  
En em rentit coupableus ar memes pec'het.

Selaouit Sant Bernard, an abat admirabl,  
Pe Sant Louis, Roue Franc, oc'h instrui e vab;  
E zifenne outan na rofe ordianç  
Da zroug prezec a zen ebars en e brezang.

Evit conclusion, deoc'h-ni, tud curius,  
Ho pedan assambles gant an teod bilimus,  
Da guemer va chanson bremà evit reglen:  
Sotoc'h evit an deu avichou er c'helen.

Qent evit finissa d'an objet a garan,  
Dezi ec'h adressiu va c'homzou divezan  
Bezit fidet d'ho quer, me vezò d'am himi,  
Bervigen goal deodou na ell hor separi.

Ferm evel ur garec er mor ous an tourmant,  
Mar bezit din fidet me zisquelo patant  
En em garimp bepret hon daou e vir galou,  
Despet d'ar goal déodou a rën dre ar c'hanter.

Ar men fondamental demeus an amitie  
Hon unisso hon daou dre ar c'hraç Done,  
Speret aoüsech'oc'h eus evit allout credi  
Ne zeus victor ehet na renquer combatti.

FIN